


KRISTENIEN DA VIKEN

DISKAN :

D'hor Mamm zántez Anna,
D'an Itron Varia,
D'hor Zalver benniget
Ni vo fidel bepred !



Hor c'haloun baour mantret
Gant glac'har hag enkrez,
Ni a zo daoulinet
Diraz-hoc'h-c'houi, Guerc'hez !

Kurun hag avel foll
Var-n-omp so dirollet,
Hor bro 'zo vont da goll,
Truez ! Mamm venniget.

Lezen Doue, guechall,
A rene kaer ar vro ;
Hirio lezen tud fall
He stlej eün d'ar maro.

'Vel eur vanden chas mud,
Gant kounnar, noz ha deiz,
Emaint e-touez an dud
O klask mouga ar Feiz.

Ni zo guir Gristenien,
Krouadurien Doue,
Savet enn he lezen
Enn he zoujanz ive.

Ni a zo Kristenien,
Prenet gant goad Jesus,
Maget dre 'c'hourc'hemen,
Gant he gorf presius.

Christenien, hor baniel
A zo kroaz hor Zalver,
Ni er zao soun 'n huel,
Bemdez, e peb amzer.

Eur brezel kriz meurbed
Zo great d'hor bugale,
Ah ! n'ho dilezit ket,
C'houi zo ho Mamm ive.

Ar falla kenteliou
Zo roet d'ezho bepred,
Koll a raint ho eneo
E skol an Drouk-Speret.

Simpl, dinerz, ker bihan,
Ma na vent diouallet,
Abred, hep kals a boan
Da goll e vent kaset.

Petra dalv guisiegez,
Mar kollomp hon ene ?
Ar skiant, ar furnez
A deu d'omp euz an e.

Guechall hon tadou koz,
Brudet 'vit ho furnez,
A glaske 'r Baradoz
Araok pep guisiegez.

Skianchou 'zò netra,
Pa'z eont enep Doue ;
Ni fell d'omp dreist pep tra
Savetei hon ene.

Guerc'hez, hor Mamm zantel,
Roit sikour heb dale ;
E plegou ho mantel,
Kusit hor bugale.

C'houi a zo gallouduz
Var galoun hor Zalver,
Bezit madelezuz,
C'houi 'zo eur Vamm dener.

E pevar c'horn ar vro,
Neuze, ni holl, Guerc'hez,
Beteg heur hor maro,
Ni a gano bemdez :

PERMIS D'IMPRIMER

Septembre 1882.

DU MARHALLAC'H,

vic. gén.

Quimper

LIBRAIRIE CATHOLIQUE ET CLASSIQUE J. SALAUN

(Tous droits réservés.)

Quimper, typ. de Kerangal.